

62

# DISPUT

## COMPOSET A NEVEZ

ETRE

UL LEONARD HAC UR C'HERNEVOT.

---

**S**ELAOUIT hac e clêfot, hac e clêfot cana  
 Un Disput so compozet a nevez er bloa-mâ  
 Zo grêt gant ur C'hernevot ha gant ul Leonard  
 Ebars santier Tregueris o fumi ur c'horniad.

Nac er bloavez mil eiz cant ouspen sez ha trêgont;  
 Eo bet savet an disput un nebeut divergont;  
 Pepini a bretante difen caus e gontre :  
 Deut d'o c'hlêvet o tisput an eil ouz eguile.

*Ar C'hernevot.*

Ar C'hernevot a c'houlen diouz ar pot a Leon :  
 Lavar din pez pansion a c'heus en da ganton,  
 Te na c'heus qet a grampoez na geletez ive :  
 Me, va mignon, em beves an eil hac eguile.

*Al Leonard.*

Tao din demeus da grampoez, da c'haletez ive :  
 Ne c'houlenin' nep sécon an eil nac eguile :  
 Ro din un tam qig eugen hac un tamic qig moc'h.  
 Da zebri gant fars güiniz, a zo delicatoc'h.

*Ar C'hernevot.*

Tao din divar ben ar c'hig , se n'eo qet un dra vad ;  
 Parlant din demeus ar yod a gavàn delicat :  
 Ro din un tam yod silet huc ur banne lèz tro ,  
 Me Jézo ar c'hig eugen gant an neb a garo ,

*Al Leonard.*

Trahissa res , va mignon , bremàn da santimant ;  
 Evit paea da fermou e ranges caout arc'hant ;  
 En ezom deus a arc'hant e teuez d'o guerza ,  
 Ha ni , entrezomp , Leonis , a voar dont d'o Iaza .

*Ar C'hernevot.*

Credi a ràn , va mignon , nac e mout e farçal ;  
 Peneverde ma teuez em brô da glasq segal ,  
 E viges bet perisset , rac ne poa qet a hed ;  
 E bloavezioù ar guernez , ni n'eus da recouret .

*Al Leonard.*

Ah ! ah ! eme'l Leonard , mad ec'h eus grêt toulla ;  
 Dont a vouie Qernevis e Leon da glasq bara .  
 Peneverde Leonis , dre ma zint oll tud vrao  
 O devije bet Qernevis assur mad var o fao .

*Ar C'hernevot.*

Un tamic ont effrontet , Leonard , bragou-bras ;  
 Ma ve grêt dide prouvi , e vez nec'het , siouas !  
 Lavaret ve Qernevis en da vrô o clasq boued ;  
 Ma ve grêt dit er zouten , meus aon na vez nec'het .

*Al Leonard.*

Hac e ranqen caout festou , memes deus da gontre ,  
 Hac e tesote cant din a so c'hoas en bue ,  
 Pere so bet soulaget ganemp-ni en hor brô ,  
 Mac a drugare Doue n'en dint qet oll maro .

*Ar C'hernevot.*

Credi a rân, va mignon, na c'heus sur tam résouz,  
 Qerse gafe Qernevis rancout mont e Leon,  
 Goude beza bet maguet a grampoez, galelez,  
 Rancout monet e Leon da zébri patates.

*Al Leonard.*

Poan a res din em c'halon, o clèvet da gomzouz;  
 Me meus quelet Qernevis na pa vijent em brô,  
 O sailla gant ar goachen goude sila ar yod  
 Gant ar c'hol ha patates, pa ellent, vel tud sot.

*Ar C'hernevot.*

Evit na col na panes na zeus qet em c'hontre;  
 Mes beza em eus irvin ha patates ivez,  
 Traou int an excellanta evit ober souben,  
 Laqat assambles ganto un nebeudic trinchen.

*Al Leonard.*

Scuiza a rez ac'hanon, poan a rez din em pêz  
 Gant da irvin, patates, hac ive da drinchen :  
 Ar seurt-se a vez roet em brô d'ar chatal mud;  
 Nonpas da oza souben da bresanti d'an dud.

*Ar C'hernevot.*

Hansav din da legumach evit ober souben,  
 Pa rez fae var irvin, patates ha trinchen;  
 Rac evit ebars em brô ne zeus qen nemeto ?  
 Noblanç ha paysantet, oll a zreb anezo.

*Al Leonard.*

Al lugumach em brô-me zo pour ha carotes;  
 Oignon, col-guen, col milan, ouspen hor bez raber;  
 Istr fao hor bez ive, col-fleur hac articho;  
 Cetu eno'l lugumach a implijer em brô.

*Ar C'hernevot.*

Consanti rân qementse na ganez , va mignon ;  
 Mes n'oar qet quer caer güisquet en escotti Leon  
 Evel ma zeo Qernevis gant o chupennou gloan  
 Hac o chupenuou mezer a vez ganto diudan.

*Al Leonard.*

Tao din, eme'l Leonard, gant da chupennou gloan  
 Ha da chupennou mezer a vez ganez dindan.  
 Da vrageyer discaret ha da c'houriçou ler :  
 Ni entrezomp Leonis a zoug oll en mezer.

*Ar C'hernevot.*

Güir mad e zeo qementse ganez-te , va mignon ;  
 Mezer caer zo en Leon , mes grêt int difeçon ;  
 Ispicial ar goazet a gavân divalo ,  
 Rac calz anê zo cazi collet en o bragou.

*Al Leonard.*

Nac ar botret e Qerne o deus roqedennou  
 A so grêt evel sier da zouguen sac'hadou ;  
 O bragueyer zo formet a ziou pe deir rideñ ,  
 O frennestou zo goal vras da chom hep stalafen.

*Ar C'hernevot.*

Nac ar merc'het a Leon o deus coefseyer bras ,  
 Na pa vezont-i fachet e vez cruel o fac ;  
 Mes ar merc'het en Qerne o deus coefseyer bêr  
 Tout int laouen a visach , tout o c'haver ceder.

*Al Leonard.*

Tao din a verc'het Qerne gant o c'hoefseyer bêr  
 A zo endro d'o bisach eguis un torchouer ;  
 Lostou o deus o c'hernou , eguis ar zaout em brô ,  
 Vit en em zigueliena e servichont dezo .

*Ar C'hernevot.*

Ne allàn mui contesti , cedi a ràn ganez ;  
 Ne qet possubl resista eneb ar virionez.  
 Me a bao boudaillad eus a greis va c'halon  
 Evit en em unani ganez , pot a Leon.

*Al Leonard.*

Cetu ni camaradet , ar C'hernevot ha me ,  
 Ne vezó den incredul demeus a guementse .  
 Un dra zo bet prouvet dirac calz eus a dud ,  
 Ar rēzon-mâ a finis etrezo an Disput.

*Al Leonard hac ar C'hernevot.*

Ar son-mâ so compost gant ur Breiziad farcer ,  
 A hanavez tud Qerne , re Leon ha Treguer ;  
 Oll int lapinet subti , mignoneta fêçon .  
 Hac en peb amzer oll dign-eus an titr a Vreton.

Hac en peoc'h hac en brezel o deus ar santimiant  
 Eus a botret courajus , dudius ha vaillant ,  
 Ha mar be ret dê un deiz , neus fors en pez tachen ,  
 E vo cavet adare *Celtiqet tor-e-ben.*

63

**AR C'HEMENER.**

Var ton : *Calz a amzer ameus collet.*

**E**UR C'hemener ne deo qet den ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Eur C'hemener ne deo qet den ,  
 Neo nemet eur C'hemener hepken .

Ne dle qet beza entêret,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Ne dle qet beza entêret  
 Nac en ilis nac er vêret.

Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Hoguen e corn ur soulet qerc'h ,  
 Oll chass ar baros var e lerc'h .

Ha peb a gaz ha péb a gui ,  
 Fardi bibao , oao , oao , oao , oao ;  
 Ha peb a gaz ha peb a gui  
 Peb a lunedou var o fri .

Ha peb a fleur en o guinaou ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Ha peb a fleur en o guinaou  
 Da gana *Requiem* da vuntrer al laou .

Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Pa ha'r C'hemener d'an dançou ,  
 E carg e sac'h a vesqennou .

Evit ma laro ar merc'het coant ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Evit ma laro ar merc'het coant ,  
 Ar C'hemener en dens arc'hant .

Pa ha'r C'hemener da c'hriat ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Pa ha'r C'hemener da c'hriat ,  
 Ne ra nemet cana ha c'houitellat ,

Nemet cana , cravat e ben ,  
 Fardi bidao , oao , oao , oao , oao ;  
 Nemet cana , cravat e ben ,  
 Ha muntra al laou hac ar c'hoent .

---

64

## CHANSON

VAR SUJET AL LABOURERIEN DOUAR.

**S**ELAOUIT oll, hac e clésof eur guentel  
**A** zo grêt a nevez var huez al Labourer ;  
**U**n etat a zo poaunius, n'o deus qet calza repos,  
**N**eb e gra gant paciantet a c'honit ar Barados.

Eul Labourer en em expos d'an amzer,  
 Qercoulz d'ar yenien evel pa vez an domder ;  
 Pa vez erc'h, scorn, caserc'h, grizill, curen, glao hac avel,  
 Baleit, hac qefot ato en e barq al Labourer.

Eul Labourer zo habillet e lien ,  
 Ne ve qet brao hemdez evel ma ve ar vourc'hizien ;  
 E habit zo struillennec , gant an donar labeet ,  
 Galz a dud a renq e gaout , hac a granch ous e velet.

Differanç a zo etre cundu ar bouri'hizien  
 Hac an hini a ra lod demeus al labourerien :  
 Ar re-ze o deus qig ha pesket, bara guen , souben vad  
     bepret ,  
 Hac eul Labourer, tamou yot, bara sec'h ha dour bervet.

Eul Labourer , baleet elec'h ma earo  
 A vez qaqetet, calz a dud en disprizo ;  
 Gouscoude qement zo et bed, mar geront dout da sénja ,  
 Eo divar goust al Labourer e ma ar bed oll e veva .

D'ar c'henta poent , e ranqo eul Labourer  
 Paea taill d'ar roue bep blos un teir pe peder .  
 D'an eil pa renqo paea , e vestr , ma na vez prest e arc'hant ,  
 E vezoo soar var e zanves : homan eo an nec'hament .

D'an drede, e renq paea an deog d'ar person,  
 Evel ma zeo ar c'hustum, qementse a zo rézon,  
 Ha rei o c'hest d'ar vêleyen, au aluzen d'ar beorien;  
 Hac evit na fazint qet, ar güir d'o servicherien.

D'ar bêvare, pa zemeer ar vugale,  
 E renquer o argouli, an danvez a izel netze;  
 Ha mar be rust ar mibien-caer, antronos goude eureuji,  
 Ma na ve prest an argoulou, er pillint evel bleizi.

D'ar bempet poent, mar sonch dont da brocedi,  
 E renq caout eur yalc'had vad a arc'hant da zistribui :  
 Neus nac avocat na procuror, gressier, huissier na serjant  
 A rae an distera tol pluen evitan aues caout arc'hant.

D'ar c'houec'huet poent, e rengo laqat evez  
 Da zioual eus an tan da gregui en e zanves;  
 Ennes a zo un element pa veur vêch alumet,  
 A laqa calz da vont d'ar bas, ha memes da glasq o boued.

Ar seizvet eo al laeron gant o oll ardou,  
 A binç eul Labourer hac a fouill e c'hodellou;  
 Ha pa ell attrap ar yalc'h, netra gantân na lezer;  
 Cetu penos goude e oll boan e za madou al Labourer.

Eul Labourer c'hoas a vez o caqetet,  
 Hac e zanves o vont, n'en deus guer da lavaret.  
 Endra ma e mât o conta e arc'haut, mignon a c'hoarzo  
 dezân,  
 Ma c'hallent e guignat e raent, hac ober goab anezân.

Ar chanson-mâ a ganer etrezoc'h, Bretonet,  
 Var un êr excellant a nevez eo composet,  
 Rac-se ta, me ho suppli da brena peb a gopi,  
 Evit e lenn ha passeai ho chagrin ha melconi.

FIN.